



Bannielou nao eskopti koz Breiz

Bleun-Brug

NIV. 34

C'HOUEVRER 1951

Klevit' ta !

An niverenn a zeu a vo e galleg. Unan a vo evelse bep fri miz. Ar re eus hon lennerien ha n'o deus ket paet c'hoaz o c'houmanant, a zo pedet da skriva d'eomp raktal, ma ne fell d'ezo reseo nemet an eiz niverenn vrezonek. **Hep respont eus o ferz, e kasimp d'ezo ivez an niverennou gallek.**

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1951 ?

Ma n'eo ket, her grit raktal,
Eun tammig bolontez vat mar plij,
Ha bennoz Doue d'eoc'h !

- 1) Koumanant bloaz d'an 12 niverenn, brezoneg ha galleg. **400** lur
- 2) Koumanant bloaz d'an 8 niverenn brezonek hepken **300** lur
- 3) Koumanant d'ar 4 niverenn c'hallek hepken **190** lur

Kas an arc'hant da : **V. Seite, Bleun-Brug, Tréboul (Finistère).**
C. C. P. 544-22 Nantes. — Lakaat ouz ke'n ar chekenn-bost pe ez eo eun adkoumanant, pe unan nevez.

Evit kement a zeil ouz danvez-skrid ar ge'laouenn, skriva da : **rener Bleun-Brug : M. l'Abbé Laurent Bleunven, recteur de Plomelin (Finistère).**

Eur goulenn

Peseurt troiou kamm a vez, pe a veze c'hoariet en ho pro da genver an deiz kenta a viz ebrel (ar pesk ebrel) ? — An troiou kamm kaera a vo embannet e Bleun-Brug miz ebrel. Respontit d'eomp buan-eta.

Eur goulenn all

Petra' blij d'eoc'h, petra' zispilij d'eoc'h, ha petra' garfec'h kaout en ho kelaouenn ? Respontit, mar plij. Klask a raimp ober diouz ho responchou. **Ar responchou gwella a vo embannet** e korn al liziri.

" DICTIONNAIRE TOPOGRAPHIQUE DU FINISTÈRE "

gant an aotrou Chaloni Perennès. Priz : 350 lur.

C. C. Rennes 69.775. Mr Pérennès, 29, Rue du Moulin, Tréboul (Finistère)

Bleun-Brug



TAOLENN

Roll Bleun-Brug Santez Anna	2
Santez Anna hag ar Vretoned (L. Bleunven) . . .	3
Istor gaer Santez Anna Wened	5
Skeudenn Santez Anna	9
Da Santez Anna (ar Bayon)	11
Santez Anna en em ziskouez (ar Bayon)	12
Sonj eus Santez Anna	13
Ar voraerien (Y. B. Kalloc'h)	14
Bleun-Brug (Mab ar c'hloc'her)	16
Kenstrivadeg al lazou-kana	17
En enor da Santez Anna (Lez Breih)	18
Rouanez an Arvor	19
Ar c'henstrivadegou all	20
Kemenerezh Santez Anna (B. Philippe)	21
Dre Vreiz ha dre ar Bed	22
Santez Anna hag ar vugale (K. Riou)	23
Leoriou nevez (Y. M.)	24
Evidoc'h lennerien	24

ROLL 33 VET GOUEL AR BLEUN-BRUG

SANTEZ-ANNA-WENED, 3, 4, 5 à VIZ EOST 1951

D'ar gwener 3 : « Devez Y. B. Kalloc'h »

- 12 eur : Digor ar Bleun-Brug, gant an anjelus bras.
- 14 e 30 : Displegadennou ha prezegennoù.
- 21 e : Sinema : 1° e Alre (films professionnels).
2° e Santez-Anna (films d'amateurs).

D'ar Sadorn 4 : « Devez Nikolazig »

- 9 e 30 da 12 e : Prezegennoù, studiadedoù.
- 14 e : Prezegennoù, studiadedoù.
- 16 e : C'hoariva brezñek (ar wella c'hoarierien).
- 21 e 30 : Dirak ar « Scala Sancta » : beilhadeg :
Iodenn genta : oberou kaera Y. B. Kalloc'h.
eil Iodenn : Santez Anna ha Nikolazig (taolennou beo).
- 22 e 30 : Prosesion ar goulou etrezek bez-meur ar re varo.
- 24 e : Oferenn kreiz noz gant kantikou war bez-meur ar re varo.

D'ar Sadorn 5 : « Devez Santez Anna »

- 8 e 30 : Kenstrivadegou.
- 11 e : Oferenn eskobel.
- 14 e 30 : Abadenn vras ar Bleun-Brug :
Iodenn genta : Koroll ha kan.
eil Iodenn : Santez Anna ar Vretoned (c'hoariva santel).
- 18 e : Prosesion veur ar parrezioù a bed santez Anna, ha bennoz ar Sakramant.

SANTEZ ANNA HAG AR VRETONED

Gant Lorans Bleunven

Evel pep sant ha pep santez, Santez Anna a zo d'ar bed kristen a-bez.

Pedet eo, n'eo ket hepken gant eur bobl hag en eur c'hornig douar, met gant an holl boblou, ha dre bevar c'horn ar bed...

Pegen gwir bennak eo kement-se, e ranker anzav, koulskoude, ez eo Santez Anna muioch d'ar Vretoned eget d'ar boblou all, e vez pedet muioch en hor c'hornig douar eget e nep lec'h all...

« An nep ne gar ket Mamm ar Werc'hez

Eus Breiz-Izel n'eo ket hennez. »

N'eo ket eus hirio, e gwirionez, eo anavezet ha karet Santez Anna gant ar Vretoned. Eskoptioù Breiz a ro d'ez, en he ofis, an ano kaer a Vamm ar vro : Mater patriae.

Ne c'helled ket rei d'ez eun ano dereatoc'h, rak istor ar skeudenn goz, bet dizoet, ouspenn tri c'hant vloaz 'zo, gant Nikolazig, e Bro-Wened, war al Santez Anna, he unan, a verk skler eo bet enoret, dre Vreiz, adalek kantvejou kenta an Iliz.

Pe hi eo he deus hor choazet ni Bretoned ? Pe ni eo hon eus choazet Santez Anna evit hor patronez hag hon difennourez ?

Diès a-walc'h a ve hen diskleria difazi. E c'heller kredi eo bet kentoc'h eun taol eus Providañs Doue.

Providañs Doue, he gwelet a reomp o skedi, koulz lavaret, e pep pajenn, eus istor Santez Anna Wened, al lec'h santel a dle dont da veza kêr-benn devosion ar bed kristen da Vamm goz Hor Salver.

Mard'eo bet savet ar chapelioù, a zo hadet stank, dre ar bed, en enor da Santez Anna, gant dorn an den, Keranna, e bro Wened, a zo bet savet gant dorn Doue : « C'hoant an Ao. Doue eo, eme Santez Anna, da Nikolazig, e vefen enoret amañ. »

A holl draon burzudus c'hoarvezet eno a ziskouez frêz d'eomp dorn Doue.

Diskouez a reont ive galloud ha madoù Santez Anna e kenver he lugale a-Vreiz :

« Evidomp-ni emañ

Hé c'harantez, vrasa

Evidomp-ni e ra

he burzudou kaera. »

Da verkou a vadelez o Mamm evito, ar Vretoned a oar ive respont dre verkou a feiz hag a garantez. E peseurt bro all, kement eget en hor Breiz, ez eus bet savet en he enor muioch a aoterioù, a skeudennou hag a chapelioù ?

Aoterioù ha skeudennou da Santez Anna a gaver e pep parrez. Ar chapelioù a zo ive stank war ribi ar mor, koulz hag e kreiz an douar bras, ha, bep bloaz, da zeiz ar pardon, e chachont war-zu enno pardonerien, a gantchoù hag a vilierou, a deu da glask konfort ha joa, e-harz treid Mamm-goz ar Mabig Jezuz.

A hent all, en despet d'an holl gizioù nevez, ano benniget patronez ar Vro, Anna, a jom c'hoaz an ano-badiziant, a vez roet an allisa d'ar Vretoned vihan. Ano, diou wech karet, dre ma z'eo hini Mamm ar Vro hag ive, dre ma z'eo bet douget gant an Dukez vat, Anna a Vreiz.

Gwelit ar Vretoned divroet, an aesa ma z'eo o boda, war an douar estren, eo evit lida asambles pardon Santez Anna. Bep hañv, ar c'hazetennoù a ro keleier d'eomp eus ar pardonioù-se, a zastum, bep gwech, ar Vretoned wella en-dro d'o Mamm garet.

Goude Breiz, her gouzout a rit, ar vro ma vez enoret ar gwella enni Mamm ar
Werc'hez eo ar C'hanada.

O terch'el sonj eus ar pezh a lavaras, e brezoneg, da Nikolazig, bremañ ez eus 326 vloaz : « An Ao. Doue a fell d'ezañ e vefen enoret amañ. » C'houi'zeuio, a vandennoù lennerien ger, da Santez Anna Wened, evit goueliou ar Bleun-Brug. Eno e vezo ouz ho kortoz gant he c'halon leun a garantez, he daouarn leun a c'hrasou... Santez Anna a zo d'eomp. Ni ive bezomp d'ezhi :

Evezail :
 ⬠ = iliz
 ⬠ = chapel
 ⬠ = ch. di/kant
 ⬠ = Karnel

0 5 10 km

Leon

Treger

Kerne

SANTEZ ANNA E BREIZ-IZEL

I. - KENSTRIVADEG AL LENN

Evit bugale ar skolioù

Evit an holl genstrivadegoù, kas anaoiur ar yugale hag o chomlec'hioù (adresses) araoù ar 15 a viz gouere da ziwvezata, da M. V. Seité, secré-
ariat Bleun-Brug, Tréboul, Finistère. C. C. P. 544.22, Nantes.

Kit da welet ar skoliou, ar vistri, evit goulenn diganto lakaat o bugale da genstriva.

Klaskit d'eomp tud yaouank evit prezeg, kana ha konta.

Sikourit ac'hanomp da baea prizioù kaer. En araok : Bennoz Doue !

I. – AN HINI A WELAS SANTEZ ANNA

Bremañ ez eus 326 vloaz e oa du-hont, e parrez Pluneret, e Bro-Wened, eur-geriadenn zister, anvet Keranna.

Etre ar c'heriadennou all hag hi ne oa netra disheñvel. He ziez a oa izel, toet e soul, tro-war-dro d'ezo, douar labour, prajeier ha lanneier...

Tri dra a oa eno, koulskoude, hag a dalv ar boan ober meneg anezo : eur groaz, eur feunteun-goz hag eur park, anvet ar Bosennoù, el lec'h ma oa bet, gwechall, war a lavared, a rumm da rumm, eur chapel da Santez Anna...

Evit dont a-benn eus ar pezh a oa o-sonj ober, Doue ha Santez Anna a zibabas eul labourer douar eus a Geranna Yvon Nikolazig e ano. Oajet oa a dri Bleaz ha tregont : oad an den, en e wir wella.

Dek vloaz bennak a oa abaoe ma oa dimezet ha n'en doa ket bet a vugale.

N'oa bet e skol ebet, ha n'oa ket bet falvezet gantañ deski galleg en aon da veza lore'hus ar pezh ne vire ket outañ da veza eun den evel ma ne vez ket gwelet kalz; eveziek, eün ha lemm kenañ a spered.

Met ar pezh a lake anezhañ da veza, hep e bar, e-touez ar re all, oa, dreist-holl, e galon; adalek e vaozankiz oa troet da ober vad; eur skouer oa evit an holl.

An holl blegou mat a gaver e koueriaded Breiz a oa ennañ, hep hini eus ar siou fall a ziskar anezo kement...

War berziou mat e natur-den en doa kavet an tu da lakaat da vleunia vertuziou kristen eus ar re gaera evit eun den eus e reñk.

Mat oa ouz ar paour ; e aluzennoù a oa ker bras ma krede lod e roe re en holl diouz an danvez en devoa.

Pedi a rae evit an Anaon ha brokus oa da lakaat oferennou ganto.

Karet a rae kroaz Hor Salver ha gwelet e veze alies o faoulina dirak ar c'hroa-
ziou a gawe war e hent.

Karet a rae ar Werc'hez; lavaret a rae e japeled bemdez; en e zorn e veze gantañ
dre ma z'ae hag en noz pa ne c'helle ket kousket e lavare anezañ: « En hent-se,
emezañ, e lakae sonjezonou mat en e benn hag e troe e spered war-zu Doue. »

Met ar pezh a oa marteze souezusa ennañ na gwelet pegen troet e oa ouz Santez
Anna; adalek e vugaleaj e veze klevet o komz anezi, alies, ha ne anve anezi nemet
e « Vestrez vat ». Gwelet e veze a-wechou o vont da bedi el lec'h, ma oa bet ennañ
ar chapel.

Ha n'eo ket an dra-se hepken; gwelloc'h a rae c'hoaz rak mont a rae atao da
gomunia bep sul ha bep gouel-berz, ar pezh ne veze ket gwelet stank d'ar mare-se...

N'hon eus ket a c'hoant da lavaret e voe Nikolazig eur Zant; met ar pezh a ran-
ker diskleria war-lerc'h kement hini en deus e anavezet mat eo, ez oa eun den dreist
ar re all, eun den leun a boell hag a furnez.

II. — BURZUDOU KENTA

Araok rei d'an hini he doa dibabet ar gefridi en doa da ober, Santez Anna a
c'hoanteas e lakaat, a nebeudou, da ober anaoudegez ganti.

Eun nozvez m'edo e spered gant e « Vestrez vat », e gampr, en eun taol, a dazas
enni eur sklerijenn vurzudus; gwelet a eure difazi eun dorn krog en eur c'houlaouenn
goar; amzer a-walc'h en divije bet, marteze, epad m' her gwele da lavaret diou bater
ha diou Ave Maria.

An dra-mañ a c'hoarveze e penn kenta miz eost 1623 c'houec'h sizun goude, eur
zulvez d'abardaez, e welas kement all e park ar boennou.

Ha n'eo ket eur wech hepken na diou, eo e welas Nikolazig an traou sebezus-se
met epad pemzek dez dioustu.

Eun dervez hañv, e vreur kaer hag heñ a oa aet o daou, da gerc'hat o ejenned
er prad tosta d'ar feunteun; araok o digas d'ar ger e falvezas ganto o c'has d'an
dour.

En eun taol, an ejenned spontet a jomas a sav ha kaer a oa o brouda ne c'helled
ket o lakaat da vont war araok. An daou zen souezet a dosteas da velet petra a oa
oc'h ober aon d'o loened evelse, ha neuze, setu amañ petra weljont.

Eun Itron vras ha kaer a oa, en he sav, troet war-zu an eienenn; en he dorn
e touge eur c'houlaouenn-veo hag he zreid a oa harpet war eur gommoulenn... teurel
a rae kement a splannder tro-war-dro ma oa sklér ar prad evel ma vije bet e kreiz
an deiz.

O welout kement all, kenta reas an daou diék eo klask tec'het; met a-benn eur
pennad e teujont war o c'hiz evit gwelet gwelloc'h, war o meno, an hini a en em
ziskoueze d'ezo; pa zistrojont, sioudaz, ne oa mui e-tal ar feunteun na goulouenn,
na sklerder, nag itron; teuzet e oant holl evel en eun hañvre.

Piou oa an itron vurzudus-se n'he doa lavaret ger?

Ha n'eo ket eur wech hepken eo ec'h en em ziskouezas d'al labourer: gwelout
a eure anezi alies; e meur a lec'h; gwech e kichen eur feunteun; gwech en e di;
atao ha deveze gened dispar, gwiskamanit lugernus...

III. — BURZUD ALL SOUEZUSOC'H

Edod d'ar 25, a viz gouere 1624, d'erc'hent gouel Santez Anna; Nikolazig a oa
aet da Alre, da govez.

Diouz an abardaez, pa gemeras hent ar gêr, ar chapel gantañ on e zorn, an
Itron Vurzudus a en em ziskouezas dirazañ; heñvel mat oa, er wech-mañ adarr,
ouz an troiennoù all, met, en dro-mañ, e komzas.

Gervel a eure Yvon Nikolazig, dre e ano, hag e lavaras d'ezañ eun nebeut kom-
zou madeleus, evit miret outañ da gaout aon.

Hag hi ha kemeret hent ar geriadenn; ar c'houlaouenn a zouge en he dorn a
sklêrae an noz hag ar gommoulenn m'edo warni a oa evel eur c'harr hag a zouge
anezi dre ma'z ae.

Nikolazig, hep beza enkrezet an distera, a yeas war he lerc'h, en hent doun, hag
ez ejont evelse; o daou, betek an tiez, hi o tougenñ ar c'houlaouenn hag heñ o lava-
ret e japeled. Pedo harp en e di, an Itron Vurzudus, en eun taol a dec'has dioutañ.

Betek neuze, gwech ebet n'en doa he gwelet e pad keit all a amzer ha biskoaz
kennebeut ne oa bet ker skeot gant ar gwel anezi. P'en em gavas er gêr, ne c'hellas
dibri tamm; ne lavaras ger ebet, koulz lavaret, d'e vreg ha d'ar zervicherien, a oa
chomet d'e c'hortoz, araok en em lakaat ouz taol. Hep dale, evel eun den, hag a zo
eun dra vras war e spered, e c'hoanteas beza e unan.

En em denna a eure er c'harr-di da dremen an noz, war zigarez, emezañ, diwall
eur bern segal a oa bet laketa eno da c'hortoz kraza.

IV. — AN ITRON GAER A LAVAR PIOUS EO

Ar c'harr-di m'oa en em dennet ennañ Nikolazig oa bet graet gant mein ar
chapel goz.

Hep diwiska e zilhad, ec'h en em daolas eno war eur vriad plouz, met ne c'hellas
ket kloza eul lagad; chom a rae da zojal, da zojal... Etre daou, epad ma lavare e
chapeled, e kavas d'ezañ klevet trouz leun a dud o vale.

Sevel a reas ha digeri an nor evit gouzout petra oa a nevez. Netra ne welas. Ne
oa ket eur penn kristen e nep lec'h.

Chom a eure strafuilhet hag eun tamm aon a grogas ennañ.

En em erbedi a reas ouz Doue da gaout truez outañ pelloc'h, hag e stagas adarre
gant e japeled, gant muioc'h c'hoaz a feiz.

Epad ma pede evelse, eur sklerder vras a leuias, en eun taol ar c'harr-di, hag,
e-kreiz ar sklerijenn-se, an Itron a en em ziskouezas d'ezañ, skedusoc'h eget biskoaz.

« YVON NIKOLAZIG, EMEZI, D'EZAN, N'HO PEZET AON EBET; ME EO
ANNA, MAMM MARI, LIVIRIT D'HO PERSON EZ EUS BET, GWECHALL, EN
DACHENN, ANVET AR BOSENNOU ARAOK MA OA SAVET ZOKEN AR GERIA-
DENN-MAN, EUR CHAPEL HAG A ZOUGE VA ANO; AR GENTA, SAVET D'IN
ER VRO A-BEZ, OA HOUNNEZ, 924 VLOAZ, HA 6 MIZ A ZO, EO KOUEZET, HA
C'HOANT AM EUS E VEFER ADSAVET, KENTA MA VO GELLET, HAG E KEMER-
PECH PREDER GANTI, RAK DOUE A FELL D'EZAN E VEFEN ENORET AMAN. »

Kerkent ha m'he devoa lavaret ar gerioù-se, Santez Anna a dec'has hag an hini
en doa he gwelet a jomas e-unan.

Ar c'homzou-se, hag a roe da anaout d'ezañ piou a wele, a gasas diwar e galon
an enkreza a waske anezi, eur pennad a oa, hag a zizammis kement e spered ma en
em roas raktal da gousket.

Nikolazig a ouie bremañ petra c'houlenne e Vestrez vat digantañ... Met nag a
boan a ranko gouzav c'hoaz evit lakaat e gefridi da vont da benn...

V. — TRUBUILHOU NIKOLAZIG

A-vec'h dihunet, Nikolazig a en em lakeas da boueza pegen pounner oa ar garg
fiziet ennañ. Seul-vui ma troe ha ma tistroe komzou Santez Anna en e spered, seul
startoc'h e teue da gredi oa dreist e c'halloud...

Penaos e vije digemeret gant Person Phueret?

Petra lavare an dud diwar e benn p'her gweljent oc'h en em emellout ouz
traou evelse?

Fallgaloni rae, ha n'oa mui evit kaout plijadur gant netra. Klask a rae beza
muioc'h mui e-unan ha ne grede ket anzav ouz den ar pezh a grigne e galon.

Hag an dra-se a badas pell.

A-benn c'houec'h sizun, Santez Anna a gemeras truez ouz e zempladurez hag a
frealzas anezañ:

« Na grenit ket, Nikolazig, emezi ha n'it ket d'en em jala evelse. Lavarit d'ho
person, pa z'ec'h da govez, ar pezh ho peus gwelet ha klevet ha sentit ouzin, hep dale
pelloc'h; en em glevit ive gant eun nebeut tud vat evit gwelet penaos en em gemere
da gas an traou da benn. »

Laouenaet ha krênaet holl gant ar c'homzou-se, Nikolazig ne varc'hatas mui. E Vestrez vat he doa gourc'hemennet d'ezañ mont da gaout person ar barrez. Mont a reas. Hemañ en doa brud da veza striz an urziou gantañ. Goude beza selaouet ar c'houeriad, e c'hourdrouzas anezañ sec'h, e rebechas d'ezañ chom da goll e amzer gant huñvreou, evelse, hag e tifennas groñs outañ kredi hevelep traou hiviziken.

Hor paourkez den a deuas d'ar gêr nec'hetoc'h eget biskoaz.

En noz war-lerc'h, Santez Anna a deuas adarre d'e gonforti. Met chom a rae muloc'h mui en entremar ha meur a wech e ranko Mamm ar Werc'hez dont c'hoaz da gaout he servicher evit lakaat en e greiz eur galon greñv a-walc'h da vont war-araok.

VI. — AR ZIZUN VRAS

D'an 3 a viz Meurzh 1625, Santez Anna en em ziskouezas da Nikolazig gant muloc'h a sked eget biskoaz. En taol-mañ e teue da lavaret he c'homzou penezusa : « NE C'HELLEZ MUI GORTOZ PELLOC'H... RET EO DIZREI RAKTAL DA GAOUT AN AO. PERSON DA LAVARET D'EZAN E FELL D'IN A-GRENN KAOUT EUR CHAPEL ER BOSENNOU... »

Rei a eure da anaout, dreist-holl, e vije gwelet, dizale, eur c'houlaouenn o skedi, er park, a-zioc'h al lec'h m'edo ennañ he skeudenn goz.

Gourc'hemenn a eure d'he c'hannad rei da anaout kement-se holl da dud vat eus e anaoudegez, gouest da rei sker hag ali d'ezañ hag a vije diwezatac'h o destou. Teir eur e padas, ar weladenn-se.

Antronez, mintin mat, Yvon Nikolazig a yeas a-nevez da Bluneret. Met digemeret falloc'h, eget biskoaz, e voe gant an Ao. Person, a lavaras d'ezañ : « Sevel eur chapel ? Biken. Amañ ez eus chapelioù a-walc'h, roit peoc'h d'in gant an traou-se. »

Nikolazig a en em dennas sioul, gouzout a rae er-vat e teuje Santez-Anna a-benn da gaout he chapel, en eun doare pe zoare, met trist kemañ e oa.

Daou zevez goude, Santez Anna a deuas adarre d'e gennerza : « Lakit ho fiziañs e Doue hag ennoun, emezi, traou burzudus a-walc'h a weloc'h ha niver divent an dud a deuio amañ d'am fedi a vezo ar brasa. »

En noz etre ar 7 hag an 8 a viz meurzh, en-dra m'edo Nikolazig en e wele, o lavaret e rozaer, da c'hedal ma teuje d'ezañ ar c'houket, setu, en eun taol, eur c'houlaouenn skedus o para a-nevez dirazañ. Santez Anna en em ziskouezas kerkent hag a gomzas outañ gant eur vouez tener : « YVON NIKOLAZIG, EMEZI, GALVIT HOCH AMEZEIEN, EVEL MA Z'EUS BET LAVARET D'EOC'H DIJA, HAG O C'HASIT GANEOC'H DA HEUL AR C'HOULAOUENN-MAN ; HOCH HENTCHA A RAO BETEK VA SKEUDENN HA P'HO PEZO HE C'HAVET, AN DUD A ANA-VEZO PELLOC'H EO GWIR AR PEZ A LAVARAN D'EOC'H. »

Ar c'houeriad, leun e galon a levenez, a c'halvas e amezeien, evel m'oa bet gourc'hemennet d'ezañ ha... burzud ! ar c'houlaouenn a gerzas en o raok warzu park ar Bosennou, betek al lec'h m'edo bet warnañ ar chapel goz.

Eno e chomas a-sav ha betek teir gwech e voe gwelet neuze o sevel hag o tiskenn hag oc'h en em goll erfin en douar.

Toullt e voe raktal war an andred. A-barz pell ar skeudenn goz a oa kuzet eno 900 bloaz a oa, a voe dizoloet...

VII. — AR CHAPEL SAVET

En despet d'ar merk sklêr-se edo an Ao. Doue a du gantañ, trubuilhou Nikolazig a badas c'hoaz epad meur a zizun.

Koulskoude ar vrud eus an traou burzudus c'hoarvezet e Keranna a redas dre ar vro evel eul luc'hedenn. E nebeut amzer, hep gouzout mat a-walc'h penaos oa aet ar c'helou betek enno, eur bern tud a deuas di da bedi ha da zigas o frofou.

A zeiz da zeiz niver ar bardonerien ne rae nemet kreski ha tro-war-dro ne oa ken ano nemet eus ar grasou dispar a reseved eno.

Tra souezus, ar re o doa enebet ar gwas a ouz Nikolazig a voe gwelet o tont ar eil goude egile d'ar Bosennou da zaoulina dirak ar skeudenn ha da anzav oant faziet.

Person Pluneret, e-unan a oa en o zouez.



Eskob Gwened a lakeas ober eun enklask piz war an traou c'hoarvezet e Keranna. Goude beza anavezet edo eno dorn Doue e roas aotre da venniga ar maen kenta eus ar chapel d'ar 26 a viz gouere, deiz gouel Santez Anna. Ouspenn 30.000 perc'hirin a oa diredet di eus pevar c'horn Breiz evit ar pardon kenta-se.

Santez Anna he doa diskleriet d'he servicher e konte warnañ evit kemeret preder gant al labour. Hen ober a reas, ha gant eur furnez vras zoken. Nikolazig, daoust ma n'oa bet morse er skol ha daoust ma ne gomze nemet e brezoneg a vo tenzorier ha rener al labourion.

Mont a reas da gesta, da c'houlenn sikour er parrezioù tro-war-dro, ar pezh ne vire ket outañ da gaout e lagad o para war pep tra.

Ar chapel savet dindan e urzioù n'oa ket an iliz-veur en doa c'hoantaet. Met an amzer da zont a dlie ober gwelloc'h ha kaeroc'h...

VIII. — MARO NIKOLAZIG

Araok mervel, Nikolazig en devoe an euryat da welout promesaou Santez Anna o tont da wir.

Tud a-vernioù a oa deuet hag a gendalc'he da zont; aluzennoù puilh a goueze eus o daouarn, ar chapel a oa bet savet ha burzudou diniver a c'hoarveze enni.

E geriadenn ken divrud a oa deuet da veza kêr-benn an devosion da Santez Anna.

Ar berc'hirined, eveljust, a blije d'ezo gwelet an den bet dibabet gant an Neñv evit eul labour ker bras.

Met hen a gave gwelloc'h chom kuzet. Kuitaat a reas Keranna, en abeg da se, hag ez eas de jom da vourc'h Pluneret.

E vuhez eno, a voe laouenaet gant daou grouadurig, paotr ha merc'h, a zigasas Doue d'ezañ, daoust m'oa deuet war an oad...

Diskleriet en doa meur a wach e felle d'ezañ beza beziet el lec'h m'oa bet dizoloet ar skeudenn vurzudus.

Kerkent ha ma klevjont oa kouezet gwall-glañv, relijiuzed Karmez, hag o doa ar garg eus ar chapel, a gasas tud d'e gerc'hat.

Ar bedenn a veze klevet oc'h ober an alies a e-kreiz e boanioù oa pedenn Hor Salver e lioz an Olived: « VA DOUE, HO POLONTEZ BEZET GRAET. »

Kovez a reas, res eo e Zoue hag o santout e nerz o vont digantañ e c'houlennas sakramant an nouenn.

Kerkent resevet e sakramanchou diweza e kouezas en e angoni.

En eun taol, e zremm drouglivet gant ar boan, en em sklerijennas gant ar joa, e zaoulagad a baras gant dudi war eun dra bennak a zeblante dont eus an neñv:

— « Ouz petra e sellit, evelse, a c'houlennas digantañ ar venec'h? »

Nikolazig hag a oa aet dilavar a respontas frêz:

— « Sellit a ran ouz ar Werc'hez hag an Itron Santez Anna, va Mestrez vat. »

Tevel a reas.

Met eur manac'h a redas d'ar chapel, a gemeras skeudenn vurzudus Santez Anna hag ouz he diskouez da Nikolazig, e c'houlennas digantañ:

— Ha gwir eo ha peus kavet, dre vurzud, ar skeudenn-mañ, evel m'ho peus hen diskleriet ken alies?

— Ya, a respontas ar c'houeriad.

— Ha bez hoc'h eus atao hevelep fizians e Santez Anna; hag eürus oc'h da ver-vel e-harz he zreid?

— Ya, emezañ adarre.

— Mat! va breur, deuet eo an eur da vont d'rak Doue, pokit d'ar skeudenn zan-
tel. »

Pokat a reas d'ar skeudenn gant doujañs ha teneridigez hag o vont a-nevez dila-
var, ne zaleas ket da denna e huanad diweza, dirak an holl relijiuzed en-dro d'ezañ.

Santez Anna, hag a oa eno, he doa habaskeat, eur pennadig, angoni he servi-
cher, evit ma vije e gomz diweza, eun testeni da harpa ar wirionez eus ar pezh en
doa gwelet.

Edod d'an 31 a viz mae 1645.

Evelse e varvas Nikolazig, an hini a welas Santez Anna hag he c'hlevas, meur
a wech, o komz outañ, e brezoneg.

Edo o ren e 54 bloaz.

II. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGEREZ

(CONCOURS DE RECITATION)

Kerent ha mistri-skol, lakit ho pugale da zeski unan pe unan eus ar
barzonegoù a za aman warlerc'h, ha grit d'ezo mont d'o displega d'ar
Bleun-Brug.

Pep barzoneg a vo displeget en eun doare beo (récitation mimée).

A - Bugale 6, 7 hag 8 vloaz.

DA SANTEZ ANNA

D'hon Itron vat Santez Anna,
Kasomp bokedou a vriad,
En eur gana alleluia !
Alleluia d'hon Itron vat.

D'eoc'h e kasomp, o Mamm garet,
Ar bokedou hon eus klasket
En hon lannou ;
Plijet ganeoc'h o digemer,
Vit ma skedint war an aoter
Gant ar goulou.

C'houi a chomo, mar d'oc'h plijet,
Dale'hmat ganeomp, o Mamm garet,
O levenez !
Ni a glasko d'eoc'h bokedou,
Ar re gaera eus hor pradou,
Bemdez, bemdez.

Gwelloc'h c'hoaz vit hor bokedou,
C'houi a c'houlenn hor c'halonou ;
Ni o ro d'eoc'h.
Vit birviken, kemerit-int,
Hor c'halonou, paour vel ma 'z int,
Mar plijont d'eoc'h.

Ar Bayon.

SANTEZ ANNA EN EM ZISKOUEZ DA NIKOLAZIG

En amzer-se, setu pell 'zo, Santez Anna,
Eus lein an Nenv, a ziskennas, e Keranna,
Leun a driste.

Ar chapel goz, savet d'ezi gant hon Tadou,
Ma tassone kement enni o fedennou
Kouezet e voe...
Ha Santez Anna a ouele.

O Mamm garet, na ouelit ket : Ho Pretoned
A savo d'eoc'h eur chapel gaer, 'vel ne vo ket
E bro ebet...

Eur chapel gaer, 'vel ne vo ket, neblec'h tro-dro,
Ha c'houi a vo, o Mamm garet, Rouanez hor bro,
Bepred, bepred.

En dachennad m'edo chapel goz Keranna
Piou 'ouezo petra sonj hor Mamm Santez Anna ?

En noz-se, an hini he devoa diforc'het (choazet)
'N em dennas, warlerc'h Koan, er-mêz diskonfortet,
Kaer en devoe gortoz, an Itron ne deu ket.

En eun taol, setu hen en e sav : hen a glev
Eur boblad tud o tont ; karget eo an henchou
A zigas d'ar penn-kêr, a drouz, a gantikou.

Hên a sav hag a sell tro-ha-tro ; n'ez eus mui,
Allas ! war an henchou, nag er penn-kêr, hini.
Souezet bras dont a ra, sonjus, betek an ti.

An noz a oa didrouz, ar stered a splanne
Perak 'n em dregas hen ?... Graet en deus eun hunvre.
Hag hi a sonj atao ennan, an Itron-se ?..

« Dihun, ma kouskez Nikolazig, setu-hi !
» Ar splannder gwenn-kann a daol en-dro d'ezi,
» A garg ar gêr, a garg al leur, a garg an ti. »

O madelez ! o madelez hep par !
Setu Santez Anna
Diskennet war an douar.
Na burzudusa tra,

O madelez ! o madelez hep par !
D'eur paourkaez labourer a zouarou Keranna
Piou 'ouezo petra 'lar, hor Mamm Santez Anna ?

J. AR BAYON.

SONJ EUS SANTEZ ANNA

Pa voen deut da veza paotrig
Ne oa er bed plijadurig
A c'hoantaen kement, 'vel monet
Da Santez-Anna, bro garet.

Sonj em eus c'hoaz,
Goude meur a vloaz,
E prosesion gaer parrez Arzon
O tremen 'n eur gana dirazon.
Martoloded,
Gwir Vretoned,
Nag e oa kaer sellet outo !
O fenn diskabell ganto,
En o daouarn eur chapelled,
Hag int koulskoude tud kalet !

Nann, biskoaz n'em boa gwelet
Netra ken kaer, neblec'h ebet.
Ha va mouezig-me, ken diste,
E-mesk o re a skoe en êr...
Bugale-skol, gwisket e gwenn,
A gan laouen an oferenn,
Ken e kreden, e oan en Ne
Ker bras e oa joa va ene.
Hag e ouelen
'Kreiz va fedenn !
Ha war va chodou
E rede daerou !

Nann ! Nann ! Neblec'h ebet
Plijadur vrasoc'h ne gaver ket...
Va c'halon baour leun a feiz,
A lamme eston em c'hreiz.
A lamme
War-zu Doue

War-zu an Itron Varia
War-zu hor mamm Santez Anna.
Hag e lavaren d'ezi
Va c'hemeret evit he faotr
Ha va gwaranti
Diouz pep droug ha diouz pep saotr.

Chomet-e vijen bet
Hep beza tamm skuizet
'Barz an iliz e-pad an deiz
Ken bras e oa va lorc'h, va feiz.

An den aman a laosk e vaz
Hag a gerz kenkoulz ha biskoaz.
An dall a reseo ar gweled,
Hag an den klanv 'gav ar yec'hed.
Ar martolod e-kreiz ar mor
En eul lestrig hanter zigor,
En-dro d'ezan tarziou spontus,
A bed ar Vamm drugarezus...
Ar mor a dav... ha deut d'ar gêr,
Ar martolod a ya emberr
Da drugarekaat ar Santez.

Taolennou a zo a bep parrez
Evit diskouez d'an holl dud
Amzer ha lec'h pep burzud.
E lec'h ebet, nann, va ene
N'hell beza ken tost da Zoue,
'Vel m'eman, pa vez e chapel
Itron Anna, hor Mamm Santel.

Diwar ar Gwenedeg.

AR VORAERIEN

Bepred pell diouz o zud dindan glao hag arnan, (arne)
Buhez ar voraerien a zo trist er bed-man,
Evit gounit bara, bara d'o bugale,
Ret eo d'ezo dilezel o bro ha bale...

Ar wreg baour, war an aod, hep skuiza, en he sao,
Ouz ar vag o pellaat, a sell, a sell atao.
He c'halon 'zo mouget en eur mor a c'hlac'har,
Ha war he bougennoù, redek a ra eun dar.

An avel a c'houtell e fardaj ar gwerni ;
Ar mestr a lar : « Paotred, liou arnev 'zo warni,
Henoù e savo bec'h ! 'n em lakomp prest eta ».
Hag holl, ar voraerien, a bed Santez Anna.

Breman war ar mor bras emaint o unan-tre
Ne weler a bep tu, 'met ar mor hag an nenv ;
Startoc'h-start, er gouelioù, avel er-maez a c'houez,
An houlennoù a goenv, hag an noz du a gouez.

Ha pa 'z a da gemer ar c'hart da hanter-noz,
'Vit ma 'z ay ar re-all eun tammig da repoù,
Ar moraer, o sonjal en e vro ken bourrus,
A gan en noz, goustad, eur werzenn kirvoudus.

Teir leo er-maez taolet, teir leo diouz douar bras,
Va enezenn a sao, du e-kreiz ar mor glas ;
Ar c'herreg astennet, tro ha tro, he goarn kloc'h
Diouz an houlennoù gouez hag a ruilh deiz ha noz.

E-mesk an holl vroioù en em strev dre ar bed,
Nann nann, n'ez eus nikun hag a zo ken karet,
O va broig a C'hroe, pa vezan pell diouzout,
Klanv oun, ha va c'halon hep ehan a hirvoud.

O va enez, kollet du-ze e-kreiz ar mor,
Pegoulz e touarin-me, en da berzier digor ?
Peur e welin-me c'hoaz sked tourioù-tan va bro
Ken splann e du an noz ? Pegoulz e teuin en-dro ?...

Hag hunvreal a ra ar paourkez martolod
'N e wreg en deus losket da ouela-war an ôd,
'N e vugale vihan, levenez e galon,
'N e di livet e gwenn a gousk er stankenn don...


Ar vag, hi, a ya 'tao dindan daoulagad an Tad,
Tro d'ar gouelioù tolpet, an Elez he ren mat.
Santez Anna, gwir vamm, a zousa an avel,
Ha mont a reont 'velse, hep aon, en noz tenvel.

Labourerien ar mor, micherourien galet
Pé galon a zo d'eoc'h, ha penaos e c'hellet
Chom evelse bemdez, en anken, er maro ?...
« Ni gred » e Doue hon Tad, hag Hen hor skor ato.

Y.-B. Kalloc'h.

Yann-Ber Kalloc'h a zo eur barz brudet bras, ginidik a Enez Groe. Lazet eo bet e-kreiz e vrud, e-doug ar brezel 14. Skrivet en deus eul levr kaer, anvet « Ar en Deulin ».

« Ar voraerien » a zo bet tennet eus al levr-se.



Skeudenn ar vag bet klenniget da Santez Anna gant martoloded Arzon, goude beza bet savetaet ganti war vor.

III. — KENSTRIVADEG AR C'HANAOUENNOU

(CONCOURS DE CHANT)

Evit ar vugale

An holl vugale o devo da gana pep hini diou ganaouenn.

Ar ganaouenn genta o vo kavet amañ warlerc'h.

An eil kanaouenn a c'hello beza n'eus fors pehini. Karout a rafemp klevet dreist-holl kanaouennou gant toniou breizek. Ar re nebeuta anavezet eo a vo ar re wella.

Hag ar gwella kaner hag ar wella kanerez o devo da gana war ar c'hoariva, goude lein, dirak an holl.

BLEUN BRUG



- 1 - Bleunvennig Brug, bleunvenn va bro
Boked ar Vretoned
M'ho kar, ha bepred m'ho karo bis.
Tre ma chomin er bed.
- 2 - Bihanig c'hoaz, dre al lannou
Pet kwech am eus redet,
Evit serri a vriadou
Ho pokedig karet.
- 3 - Ha pa gouskin e doun ar be
Va diweza kousked,
War va ludu, savit d'an Nenv
O ! va boked karet.
- 4 - Hag en deiz-man e Keranna,
Gant ho kleierigou,
Da enori Santez Anna,
Sonit a villierou.

MAB AR C'HLOCHER.

IV. — KENSTRIVADEG AL LAZOU-KANA

(CONCOURS DE CHORALES)

REOLENN :

- 1 — Pevar derez a zo er genstrivadeg-man : peder mouez dishenval - teir mouez dishenvel - teir mouez kompes - diou vouez.
- 2 — Pep laz-kana a c'hell kenstriva e n'eus forz peseurt derez, ha zoken e meur a zerez.
- 3 — Pep laz-kana a dle rei, d'an nebeuta, diou ganaouenn eus an hevelep derez : unan eus ar c'hanaouennou ret, hag eur ganaouenn-libr.
- 4 — An holl ganaouennou a dle beza e brezoneg.

TAOLIT EVEZ :

Evit a neil kanaouenn, pep hini a c'hell dibab ar ganaouenn a gar. An toniou gallek, avat, war gomzou brezonek, ne vezint ket digemeret. E-touez an toniou keltiek : kembraek, skosek, iwerzonek, breizek, e vo dibabet kentoc'h an toniou breizek. Ar re-man a zo dreist-holl hon tra d'eomp-ni. Kaer int, ha fall e ve d'eomp ober fae warno.

KANAOUENNOU RET :

4 mouez ha 3 mouez diskenvel : o goulenn digant : M. l'abbé Dérian, Petit Séminaire S^{te} Anne d'Auray, Morbihan.

3 mouez ingal : Luskellerez (Tralalaleno, pajenn 38).

2 vouez ingal : An teir-Seienn (Tralalaleno, pajenn 40).

LEVRIOU KANAOUENNOU :

Erbedi a reomp d'al lazou-kana, al levriou-man :

1^o *Tralalaleno* : 30 chants bretons harmonisés à 2 et 3 voix égales. Al levr : 120 lur.

2^o *12 chants harmonisés à 4 voix mixtes* : 140 lur.

Evit ar ganerien o unan :

Mojennou ha Soniou Paotr Treoure.

An holl levrioù-se a zo e gwerz e :

Société B. A. L. B., Boîte Postale 108, Rennes.

EN ENOR DA SANTEZ ANNA PATRONEZ BREIZ

- 1 - Ni Bretoned, karomp hor Mamm ha Rouanez,
Hi eo Mamm-goz Jezuz ha Mamm ar Werc'hez.
Enoromp a galon, meulomp war eun dro
Santez Anna, Itron hor Bro !

DISKAN :

Santez Anna, Itron hor Bro,
Astennit ho torn tro-ha-tro
Hag hor bro e peoc'h a vevo.

- 2 - En amzer dremenet, gant he c'hurunenn,
E-mesk ar poblou, Breiz a save he fenn ;
Allas ! ma n'he deus mui Duged na Rouane,
Eur vamm he deus e lein an Nenv.
- 3 - E Kerahna Wened, d'eur c'hêz labourer,
Hor « Mamm vat » 'n em zikouez, gronnet (1) a splannder ;
Ha setu tri c'hant vloaz ma 'z eo enoret
Vel Itron, gant ar Vretoned.
- 4 - En ho taouarn eman ar grasou gwella.
En ho kalon Breiz eo ar vro garet.
O Mamm, krenvait ar Feiz hag ar Santelez
Dre holl, strevit peoc'h, levenez.

LEZ-BREIH.

(Troet diwar ar Gwenedeg.)

(1) Gronnet a = en-dro d'ezi.

Evit kaout an ton, e peder muez eus ar ganaouenn-mañ, skriva da : Abbé Deriau,
Petit Séminaire, Sainte-Anne d'Auray.

KANTIKOU DA VEZA KANET GANT AN HOLL E-PAD BLEUN-BRUG SANTEZ ANNA

Daou gantig a zo bet dibabet evit oferennou ha prosesionou Bleun-Brug santez Anna.

Ar c'henta : « O Rouanez an Arvor » a zo unan eus kaera kantikou Bro-Wened. Pep hini hen desko hag her c'hano a greiz kalon.

An eil : « D'hor Mamm santez Anna » a zo anavezet mat dre holl. (1)

I. ROUANEZ AN ARVOR



(Diskan) O Rouanez karet an Arvor. O Mamm leun a drue War an dou.



- ar War vor Goarnet ho pu-ga-le. (Bz) Itron Santez An-na



Ni ho ped a galon Ni en em lak gant joa Dindan ho proteksion

DISKAN :

O Rouanez karet an Arvor,
O Mamm leun a drue,
War an douar, war vor
Goarnet ho pugale.

1

Itron Santez Anna
Ni ho ped a galon :
Ni en em lak gant joa
Dindan ho proteksion.

2

Ho kalon 'zo digor
'Vit holl ar Vretoned
An dud eus an Arvor
Ho kar ive bepred.

3

Patronez Breiz-Izel,
An Arvoriz gant gred
A c'houlenn ho skoazell :
O zikourit bepred.

4

Itron leun a zouster,
En hon holl ezommou
Diskoeit en hor c'henver
Galloud ho pedennou.

5

E labouriou kalet
E tremen hor buhe :
Diouz peb droug, Mamm garet
Hon diouallit bemde.

6

Hor c'horf hag hon ene
A ouestlomp d'eoc'h joaius,
O Mamm, eus lein an nenv
Bet ouzomp truezus.

7

Hon diouallit o Mamm
Diouz ar pec'hed marvel,
'Vit m'hor c'havo divlamm
Ar Barner eternal.

(1) : D'hor Mamm Santez Anna... (Kantikou Kemper)

V. — KENSTRIVADEG AR C'HANAOUENNOU POBLEG

Evit an neb a garo

Bez 'e vo gellet kana n'eus forz peseurt kanaouenn. Ar c'hanaouennou gwella a vo ar re n'int ket bet c'hoaz moulet.

VI. — KENSTRIVADEG AR GAERA RIMADELL

(CONCOURS DU PLUS BEAU MONOLOGUE)

Evit paotred ha merc'hed yaouank ha re all.

Evit kenstrivadegoù ar re vras e vo ret kas an anioù, araok hanter miz gouere da V. Seite, Bleun-Brug, Treboul, Finistère C.C.P. 544.22 Nantes. Ar re a fell d'ezo hor sikour da bae prizioù, a c'hell kas arc'hant pe draou all d'an hevelep adres.

VII. — KENSTRIVADEG AR PRESEGEREZ

(CONCOURS D'ELOQUENCE)

1^o Evit paotred ar maezioù eus 17 da 25 bloaz hag evit ar studierien eus 17 da 22 vloaz.

« Diskouezit eo Nikolazig skouer al labourer douar breizat ha kristen hag e vo enoret bras labourerien douar Breiz-Izel, en deiz ma vo laketa war roll ar sent. »

2^o Evit merc'hed ar maezioù eus 17 da 25 bloaz hag evit ar studierezed eus 17 da 22 vloaz.

« Gant skouerioù tennet eus istor santez Anna Wened, diskouezit o deus merc'hed hor bro (plac'hed yaouank ha merc'hed dimezet) kavet e santez Anna, ar batronez wella a c'hellent kaout. »

(Ar re genta a c'hounezo hep a skeudenn (statue) da santez Anna.)

An holl kenstrivadegoù a vo graet, e kloerdi bihan santez Anna Wened, d'ar 5 a viz eost, etre 8 eur 30 hag 11 eur.

VIII. — KENSTRIVADEG AN TRESEREZ

(CONCOURS DE DESSINS)

Evit ar vugale

Ijinit eur skeudenn livet a vo warni tra pe dra eus istor gaer santez Anna Wened. Ment ar paper a dle beza : 27 x 21.

Kas al labourioù da : M. l'abbé Le Lannic, petit séminaire, Sainte-Anne d'Auray, Morbihan, araok ar 15 a viz gouere. Arabat ankounac'haat lakaat an ano hag an oad war ar skeudenn.

Ar re gaera a vo diskouezet er gouel.

KEMENEREZ SANTEZ ANNA

Dastumet gant B. PHILIPPE.




Peus ket sonj o den yaouank eus a bardon Santez-An



na. Peus ket sonj o den yaouank eus a bardon Santez An.



na Ho poa d'in me prome-tet Ho pi-je va c'he-



me ret Ho poa d'in me prome-tet Ho pi-je va c'heme-ret.

Peus ket sonj, o den yaouank ! bis
Eus a bardon Santez Anna,
Ho poa d'in-me prometet
Ho pi-je va c'hemeret.

Gwelloc'h ve d'eoc'h den yaouank, bis
Beza graet d'in eun taol marvel,
Beza skoet va c'halon,
Siouaz gant beg eur gontell.

Eur galon pa n'eo gwall skoet, bis
A zo molen d'he farea ;
Hon enor, eur wech kollet
N'he c'havomp mui da brena.

Me 'zo eur gemeneres
'Vez bemdez 'c'hounit va devez bis
Ha me 'glév an teodou fall
Hep paouez ouz va zamall.

An houarn hag an dir, bis
Uza 'reont dre amzer hir.
Met chadenn ar garante,
Hounnez ne uzo morse.

Eur son goz
dastumet gant an Dr Philippe
eus Treboul.

Embann a reomp ar son-mañ dreist-holl en abeg d'an ton a zo kaer ha dre ma komz eus Santez Anna.

DRE VREIZ HA DRE AR BED

ACHU AR BLOAVEZ SANTEL...

D'ar sul 24 a viz kerzu eo bet serret en Ilizou meur Roma, an doriou santel a oa bet divañsonet eur bloavez araok, evel sin an digor roet d'an dud da c'hrasou ispisial a bardon : dre an doriou-se o deus tremenet epad ar beoaz, milionou a dud deuet eus pep bro (nemet ar re a zo drek ar ridoz-houarn), pirc'hirined e-leiz, evel ne oa biskoaz bet gwelet. Hon Tad santel ar Pab en deus e-unan serret dor santel iliz sant Per.

Bremañ eo ilizou ar bed holl a vo digor bras da reseo ar Gristenien a fello d'ezo gonit pardon hag induljañsoù evit o fec'hejou. Gant ma vo evit ar bed eur bloavez a Jubile, da lavarout eo a levezeg ha da drid. Rak feñval awalc'h an traoù !

BREZEL BEPRED

Ar brezel a zo bepred e Korea : tud lazet, kêrtoù pladet, tud rivinet o klask repu n'ou-zont ket pelec'h... Pez n'houle ket gwelout tud 'zo, a zo bremañ anat-kaer : Sinaiz (les Chinois) a zo aet e-barz ar brezel a-enep an Amerikan. Mar kred hiniennou eus ar Broioù Unanet e c'hellint gant pasianted ha komzou brao, lakaat Sinaiz da ziskregi, me n'oun ket ken sur se. Sinaiz o deus ar vrud da gaout enno ouspenn koad rêz, eun tamm mat a goad tro.

MERC'HED BIHAN FREDERIK HAG AR BABIG BRETON

Soñj hoc'h eus marteze eus beaj Frederik roue en Danmark e Paris e-pad miz kerzu : Frederik resevet gant Presidant Republik Bro-C'hall hag all... Pez n'ouien ket, na c'hwi kennebeut all n'ouzoc'h ket, eo e oa bet kinniget d'ezañ evit e vugale gant Visant Auriol, profou a bep seurt, traoù kran eus Paris evel eur valizenn e kroc'hen krokodil, hag ivez peogwir eo merc'hedigou bugale Frederik, e oa bet kinniget eur boupinell, eur babig, unan eus ti-labour ar Minor e Pont-n-abad ; rak evel a ouzoc'h, n'eus ket e Bro-C'hall hag er bed a-bez, poupinelloù ken cheurc'h, ken koant. Met ar peñz a zo bet diêz eo ingala an traoù etre ar vugale : rak kompren mat a rit, pep unan eus ar merc'hedigou a felle d'ezhi kaout ar verc'hodenin gaer eus Breiz, hag a rae foute-kaer eus ar malizennou ha traoù pompadus Paris. Met siwaz ! ne oa bet profet gant ar Presidant nemet eur babig !

KRENIΟΥ-DOUAR

Rezon em boa da gomz deoc'h diwar-benn distonkadennou an Etna en Italia : derc'hel a ra ar menez-tan-se da zisteurel maen-teuz. Da gredi 'zo en deus kalz a dra c'hoaz en e got. Met lennet em eus abaoe, ez eus bet er bloavez tremenet, kreniou-douar dre ar bed muioc'h eget abaoe... den ne car, ha kreniou-douar spontus, hiniennou anezo. Da skouer, hini an Nepal (e-kichen an Indez) e menezioù an Himalaya, en deus dilec'hiet menezioù, diskaret ar re-mañ ha lakaet ar re-se da sevel.

Met ar bloaz-mañ en deus c'hañs ivez da veza eur bloavez a stroñs : d'an 18 a viz genver, e Gwinea-nievez, e kichen an Aostralia, eo kraget ar menez Lemington, da skei heñ ivez maged, ludu, aezennou lazus, maen-teuz : ouspenn 50 Europad ha 5000 den eus ar vro a zo bet taget gant an taol kenta.

Rezon em boa d'ho lakaat war ho tiwall : setu, d'an 23 a viz genver, eo bet santet eur c'hren-douar e kreisteiz ar vro : Konk-Kernev, Kemperle, Pondivi. Met bezit dinec'h : douar Breiz a zo start mat.

KALANNA AR GOUARNAMANT D'AR VRETONED

Gouzout a rit, pe gentoc'h n'ouzoc'h ket, ez eus ouspenn 60 vloaz, ma c'houlenn ar Vretoned digant Gouarnamant Paris, ma vefe desket ar brezoneg er skolioù. Ret eo beza penn-kalet evit derc'hel da c'houlenn keit-se. A-benn ar fin eo bet votet eun dra bennak, daoust d'ar gabañ lakaet da sevel a-enep al lezenn nevez-se gant Akademi Bro-C'hall ha kazetennou bras Paris. A drugarez d'an Aotrou Pleven ha da gannaded (deputees) ar vro a oa holl a du gant kelennadurez ar Brezoneg, eo tremenet evelkant. D'an 22 a viz kerzu ! N'helle ket goriz kalz muioc'h hep na vije bet ar bloaz war terc'h.

O ! N'eo ket eur c'halanna bras : eun draig bennak hepken. Eun nor digor hepken d'ar brezoneg ! Aotre da gelenn kentoc'h eget tu d'hen ober. Rak ar re a dremenno war, ar brezoneg evit ar Vachelouriez (baccalauréat) ne vo koñtet dezo ar poentou gonezet en tu hont da 10, nemet evit kaout meneg a veuleudi (mention) ; ne servijo ket evit beza digemeret hepken. N'eo ket eta kalz a dra. Gwelloc'h eget netra eo evelkent.

Mar domp awalc'h evit huchal kreñv, holl asambles, e c'hellimp hep dale, sur mat, tapout muioc'h, hep goriz en dro-mañ 60 vloaz. Met peñz a vank da galz a Vretoned eo kredi ez int Bretoned, ha difenn o zamm kreun a Vretoned baour. Ha koulskoude, petra int a-hend-all nemet tammouigoù krotous a nefra, mat hepken da sach a goap war o choug.

Ar bed a dro
An eur a sko,
Ar yer a skrap ato.

SANTEEZ ANNA HAG AR VUGALE

War 1.300 burzud merket e paperiou iliz Santez Anna-Wened, ez eus eun tri c'hant hanter bennak graet evit mad bugale.

Etre 1627 ha 1657, tri bugel warn-ugent a zo savet a varo da veo goude beza bet erbedet da Santez Anna. Da bet al he deus Itron Keranna miret ar vuhez daoust d'an tan, d'an dour pe d'an ampoezon !

Evel eur gwir Vamm-goz, plijet he deus Ganti ober war-dro ar vugale ha lodenna d'ezo ar madou bet fiziet Enni gant Ior Salver Jezuz-Krist.

Setu emañ unan bennak eus ar mirakloù-se, evit ma kresko, muioc'h-mui ho fiziañs e madelez ar Vamm-Goz hag he Mab-Bihan.

1629, 27 a viz gouere, en eur vilin eus Gomenée, parrez en eskopti Sant-Malo.

Brao eo an deiz-Nijal a re ar gwenliled a-rez ar stank. Skedi 'ra ar bleuñv e melezeour an dour sioul. Ha war an hent tost, merc'hig ar miliner a c'hoari, o sellout gant levezeg ouz an dour, hag ouz ar bleuñv, hag ouz ar gwenliled, o selaou trouz an dour er skluz ha kan al laboused e gwêz an draonienn.

He zad, Erwan Samson, er vilin, a gont d'e amezeien ar gouelioù kaer en doa gwelet d'an deiz a-raok e Santez-Anna-Wened. « Hag ar burzudou bet c'hoarvezet enoo ! »

Eur paotrig mut eus Landieg, emezañ, Fanchig Séselle, a zo bet distagellet e deod goude dont teir gwech gant e dad da Geranna.

Unan all, eus Lambal, Mikael Donalan, a oa maro kerkent ganet. Prometi 'reas e dad mont da Santez-Anna, ha beva diwar bara ha dour e-pad e birc'hirinañ, ma teufe e vugel da veva a-walc'h a amzer evit beza badezet. Klevet eo bet e bedenn. Kristenet eo bet ar mabig, ha beo eo atao dre c'hras Doue ha Santez Anna.

Bremañ tri bloaz 'zo, Franseza Marker, eiz bloaz, a gouezas dindañ rod eur vilin. Goude pedenn he mamm hag he zad ez eo savet adarre yañ-h-pesk ba dibistig. »

« Erwan ! Erwan ! Deus buan ! Kouezet eo da vere'h er stank ! »

D'ar red ez a Erwan er-maez. Ne weler mui ar plac'hig. Samson a ziskenn er stank gant eun amezeg. Dour o deus betek e gouzoug. Kaer o deus klask, korf ebet. Goude furchal ha difurchal e-pad eun eurvez, e c'houlenn an tad sikour an Itron Santez Anna. E wreg, daoulinet war an hent, a bed ivez ar Vamm-goz. Ha setu ma stok troad Samson ouz kerc'h vere'h, dame'holoet gant pri ar strad. Maro eo, siouaz ! Ken start eo serret javedou ar bugel ma trañlher daou zant o tigeri anezo. Ouspenn eo ret lakaat eun tamm koad etre an dent evit derc'hel digor ar genou.

Met ar gerent a bed kalonekoc'h c'hoaz evit ma rento Santez Anna ar vuhez d'ho mere'h.

Da benn kenta 'n noz e kredont he deus ar plac'hig tennet hec'h alan ; da greiznoz e kav dezo he deus-hi finivet he daoua ; gad. D'ar mintin, douetañs ebet mui. Rak ar vere'hig a zistag fraez : « Mamm, c'hoant kousket am eus ! ».

Emañ an heol o sevel. Ha dioustu, Erwan Samson en hent. Kerzout a ra laouen-barr e galon war-du Ti ar Vamm-Goz, mall gantañ trugarekaat Anezi, mall gantañ kinnig Dezi e levezeg.

« Eur vere'hig am boa ! Hag ez eo bet kollet ! Adkavet eo ! Doureier ar skluzioù, rodou ar milinoù, laboused an traoniennou, gwenliled en aër, bleuñvioù o 'n em zispaka a bep tu d'an hent, ganin-me kanit meuleudi ha gloar d'an Itron Santez Anna, Mamm-Goz dispar Breiziz ! ».

K. RIOU.

Levriou Nevez

KONCHENNOU AR STER AON

gant yann, ar Floc'h, e gwerz e ti Le Dault, leorier e Kemper. Priz : 397 lur.

N'eo ket konc'hennou a vank d'eomp, e brezoneg : marvailhoù, rimadelloù, kontadennoù, e korn an oaled hag e lec'h all, bez' ez eus a vil-vern hag a vil-seurt anezo, e pep korn eus ar vro. Eus bro ar Ster-Aon ne oa ket c'hoaz, na kontet gant eur bluenn ken divorfilet eget hini Yann ar Floc'h, en eur yez ken founnus ha ken digemsek.

Ma tell d'eoc'h kaout eul leor konc'hennou beo, rik ha yac'h, set' amañ unan a zoare.

E-touez ar c'hontadennoù a gaver ennañ, ma 'z eus meur a hini hag a zo heñvel a-walc'h etrezo, meur a hini all hag a denn kalzik da goñtadennoù gallek, arabek hag ejiptek, e ranker lavaret ez eus ivez hag a zo nevez o danvez hag o doareoù, da skouer hini « Bertele » a zo dreist, ha reoù all c'hoaz.

Daoust d'ar pezh a c'hellfed pismiga diwarbenn ar vammenn m'int bet tennet, hag ar saour a zo ganto ret eo amzañ emañ penn-da-benn, gant ar c'hontadennoù-se, ijin ha feson ar Ster-Aon. Kaout a reer ivez ar yez hag an doare kontañ : ganto e teskoec'h pegen lijer eo teod eur C'hernevad ha pegen lemm spered eur c'hloc'her... Setu mar hoc'h eus dija eun dousennad levrioù kontadennoù en hoc'h armel, prenit hemañ memes tra : brezoneg, kenkoulz n'hoc'h eus ket ha kalz falloc'h hoc'h eus sur !...

Y. M.

EVIDOC'H LENNERIEN

Ho kelaouenn « Bleun-Brug » a dle kaeraat.

Evit kaeraat e tle kreski niver he lennerien.

Penaos ober ?

N'eo ket diès.

Pep lenner, diwar hirio, e glasko tro-war dro d'ezan eul lenner muioc'h, eur c'houmananter muioc'h.

Ha setu, en eun taol, e vo kresket eus an hanter niver hon lennerien, hag e vo ivez brasaet hor galloud eus an hanter. Neuze avât, e weloc'h ho kelaouenn o kaeraat, evel ar glazeri dindan gliz an nevez-amzer.

Ha re eo goulenn kement-se diganeoc'h ?

Ne gredan ket :

Bec'h eta d'al labour !

Pep hini e goumananter nevez.

Goulennit diganeomp niverennoù koz da skigna. Skrivit d'eomp hoc'h alioù.

EVIT BEZA EZEL EUS AR BLEUN-BRUG

Ar skodenn a 200 lur a ra beza ezel ordinal.

Ar skodenn a 500 lur : ezel a enor.

Ar skodenn a 1000 lur pe ouspenn : ezel madoberour.

Gant ar gartenn a enor pe madoberour e c'heller kemeret perz evit neitra e holl c'hoariadegoù Kendalc'h ar Bleun-Brug evit ar bloaz.

Ar skodenn a zo da veza kaset da : V. Seite, Bleun-Brug, Tréboul, Finistère. C. C. P. 544.22. Nantes. pe grit digemer mañ d'an hini a vafe d'ho kavout eus hor perz.

Kenvroad ker, deuit davedomp, hag a gevret e raimp labour dispar evit Breiz, hag hor vez karet.

(Kerkent ha resevel hoc'h arc'hant e vo kaset d'eoc'h eur gartenn hervez ho skodenn.)

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Recteur de Plomelin.

Tirage : 1.500 exemplaires



E TI

SOUFREREZ KERNE

E. BEGOT

13, straed Jean-Jaurès, QUIMPER
Téléph. 9.33

E vez dreset adteuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou
Gwerz a c'holoioù a bep ment — Labour vat, graet hep dale


MOUSSEUX SUPÉRIEUR "V^{re} AUBIN"

Gwin-Spoumek Dreist
E gwerz e ti an holl Varc'hadourien-Gwin
dre ar Vro a-bez

Poupées. Broderies

Le MINOR

Pont-Sabbé



Bretagne

STAL LEVRIOU LE DAULT

16, Straed Ronan Madeg
KEMPER

Levrioù brezonek, Gallek, ha skeudennoù
RE GOZ, RE NEVEZ diwar-benn BREIZ

Prenet e vez ho levrioù (ha goloioù koz) diganeoc'h
Betek en ho ti ma c'houlennit

E TI
TREANTON

e kaver peb tra

Harnachou, Kinkailherez, Glaou
Koat " an Nord "
Houarn

Ha kement tra ho peus ezomm
en ti
war-dro an ti
hag en tiegez



TI TREANTON

E LANDIVISIAU

war Blasenn an iliz ha plasenn Lourdes

TELEFON 7



E KASTELL-PAOL

war ar Blasenn Vras

TEL. 130